

Soun ar gual Verc'het

Goulenit soun ar Plaih tromplet

1

Dimezet oun ne nac'han ket
Eur vaoues vian e meus bet
Er vaoues vian ag hi drouc
Ag er pez tortic var e c'houk

2

Ounes a ra dime luskelat
A reço c'hoas meur a daol troat
Bet e ra digne ober kof moan
A mond dam guele eb kam dam c'hoan

3

Ober a ra digne goeri ar Fourn
A reço c'hoas meur a daol dourn
Ounes a ra dime goasoc'h c'hoas
Pilat lan gant va zreit noas

4

Va rochet digne a vez goal c'het
Bars e poul angoes an dinvet
Ag a vez lakeat da ze c'ha
E glud ar yer kina-deu a n'han

5

A c'hoas evit kaout va butum
Meus mil vizer pad ar zizun
Mes madame a gustum boura
Leun e Fri a vutum prisa

6

Mes va madame zo unan fine
Me mevez dour ag hi en deus guine
Me mevez souben er volen
Ag hi en devez fritozen

7

An dervez ma hoan me Fortugnet
Eo brasa malheur a meus gret
O kemeret er vaoues vian
Exemple deoc'h tout paotret yaouank

REFRAIN

Allo allo paotret yaouank
Poent eo Fortugnia ma peus c'hoant
C houi a vo lakeat nec'het
Dioualit ous ar goal verc'het

Reproduction interdite.